

CHOMADENN ARZEL : DANS(E) TA CLASSE

PA VEZ GWELLAET AN NOTENNOÙ DRE AN DAÑS

Ober gant jestroù evit taolenniñ meizadoù diaes da eñvoriñ : setu al labour a oa bet boulc'het e 2023 gant ar gorollourez Marion Lévy hag ar vugale er skolaj Jacques-Prévert e Gwengamp, gant sikour ar gelennerien. Brav eo an disoc'h : al lodenn vrasañ eus ar skolajidi o deus merzhet e komprenont hag e teskont gwelloc'h pa fiñvont. Ur sell war ar stignad Dans(e) ta classe a oa bet diskouezet e Pariz e miz Ebrel gant skolajidi e 4vet klas

Dañsal evit ober kevrennoù ha displegañ an anvioù-gwan-verb : ur soñj dic'h ortoz... Koulskoude eo ar pezh a voe diskouezet dimp war unan eus leurennoù C'hoariva Ti-kêr Pariz, e penn-kentañ un endervezh e miz Ebrel, gant 21 a skolajidi e 4vet klas eus ar skolaj Jacques-Prévert e Gwengamp. « *Biken ne ankouain kement-mañ : ma zo div eeunenn genstur ec'h a kement eeunenn a zo a-skouer gant unan da vezañ a-skouer gant eben* », eme Chloé en ur dresañ div linenn gant he divvrec'h tra ma teu brec'h ur gamaradez dezhi da droc'hañ anezhe. Ar pezh a weler dirakomp eo disoc'h ar stignad « Dans(e) ta classe » a zo bet ijinet gant ar gorollourez Marion Lévy ha kaset ganti war-eeun er skolioù. Ober gant ar memor kinestezek : sed aze ar soñj a oa diwanet e 2022 diwar ur raktres Deskadurezh Arzel ha Sevenadurel er skolaj-se. « *Komprenet em boa ne veze ket kemeret perzh gant ar gelennerien er grouidigezh, eme an dañserez un toullad munutennoù a-raok an abadenn. Neuze em boa bet c'hoant da adlakaat anezhe e-kreiz ar stignad ha labourat a-zivwar ar programm skol.* »

SKOILHOÙ : N'EUS KET ANEZHE KEN

Abaoe an distro-skol 2023 e vez gwelet korollourez ar gompagnuezh Didascalie ur sizhun bep miz er salioù-klas, asambles gant ar gelennerien. Eeun eo ar soñj : « *Bewech ma vez anavezet ur meizad start gant ur c'helenner e klaskomp ur mod all da lakaat kompren anezhi, er c'hlas, dre ar c'horf* » emezi e berr gomzoù. Souezhet e oa ar skipailh kelennerien da gentañ met kendrec'het e oa bet buan. « *Merzhet em*

eus pegen talvoudus e c'hall ar c'horf bezañ evit tremen dreist skoilhoù anaoudele zo, ha pa vefent sanket don. En arnodennoù e welan skolidi oc'h ober jestroù alies zoken evit respont da c'houlennoù yezhadur », a lavar Corinne Fauconnier, kelenner e galleg. « *Skolidi zo a grede dezhe start ne oant ket evit deskiñ tra ebet. Kavet o deus ur mod all d'ober gras d'al labour a vez graet gant Marion* », eme Tanguy ar Floc'h, kelenner istor-douaroniezh.

Ken laouen all eo ar skolidi. Gwir eo, diouzh ar pezh o doa lavaret Flavie, Maiwann, Juliette, Ethan ha Dany kenkent ha diskennet diwar al leurren : deuet int a-benn da wellaat o disoc'h ouz-gras d'an abadennoù gant Marion Lévy. « *Ober jestroù a sikour ac'hanon evit argoulennoù teknikel, evel displegañ an amzerioù*

da skouer » eme Maiwann. « *Bremañ e ran fiñvadennoù evit delc'hen soñj ivez. Aesoc'h eo din deskiñ mod-se* » a lavar Flavie. « *Dre forzh ober jestroù asambles er c'hlas em bez muioc'h a fiziñs ennon* » a lavar Dany. Evit ar pemp kamarad eo sklaer evel lagad an naer : « *Gallout a reer deskiñ pep tra dre ar jestroù, ha gwelloc'h e reer dre fiñval* » Engouestlet eo ar skolidi ha birvilh

zo enne, setu unan eus disoc'hoù gwellañ ar stignad-se, hervez Genevière Roussel, renerez ar skolaj : « *Ar mod-se da zeskiñ dre ar c'horf zo talvoudus-tre ivez abalamour ma ra dezhe adkavout plijadur o teskiñ* ». En em soñjet eo Marion Lévy war an abadennoù arzel-se

p'he deus gwelet ec'h aent d'ober ur gwir hentenn bedagogel efedus : klask a ra sevel patrom he stignad, asambles gant Diey-nébou Fofana-Ballester, enklaskerez e skiantoù an deskadurezh, abalamour d'an dañserien ha d'an dañserezed all d'ober gantañ e skolioù all. Gallout a ra lavaret gwir : a-wechoù e vez dav fiñval evit kompren ●

« GALLOUT A REER DESKIÑ PEP TRA DRE AR JESTROÙ »



Les circuits électriques, trop difficiles à comprendre ? Pas au collège Prévert, où pour comprendre les liens entre moteur, isolant et interrupteur, on les représente avec son corps.

STEPHANIE PRÉMEL

Stéphanie Prémel

● PLUS D'INFOS

marionlevy.com/la-cie-didascalie